

186

Les fol^{os} 319 - 322 v^{os} étant la fin de la quere, Leur newe
Crec'h-Morwan dont le début se trouve aux fol^{os} 124 - 131 v^{os},
ont été transcrits à leur place normale. Voir plus haut
pages 74, 74 bis et 74 ter.

Au fol^o 323 recto, titre (écriture du D^r Halleguen):

ar Boudedeo (le juif errant) hag ar den koz mizer.

(323 recto)

[rien, aux fol^{os} 323 verso et 324 recto.]

Ar Boudedeo hag ar Den Koz Mizer.

(324 verso)

Tost deus ar ger a Wengamp int en em renkontret
Evel daou den ancien int e nem Saludet
Isak a souje deaz wa 'r Kosan den a wa
Ha Kerkent en eus Kavet c'hoas Kosoc'h evit an.

Ar Baourantes p'an gwelas en deus deaz laret:
— De mat da c'h Boudedeo, ast a rit tu popred
Na pellac'h id-hu breman gant ho barv leun a choës,
Gwal Skuiz Seblantit bean, perag chemel e mes?

— Sierras! me 'zo o vale gant Doue Kondonnet
Rag wit eun den truezuz, distruer e zon bet
Ken a deui 'r' varn direan, allas! ne varvin ket!
ho Spont brassan a vije dime Sperans meurbet.

Pa 'y devo heget Doue, ar oll dud fall a mad,
Pa vo Kouet ar enñ a tarzet he lagad
Pa vo dihentel ar douar, memeus deus ar varo,
War ar boull dall deus ar bed baleand vin atô.

(325 verso)

War pense al lestr Doue, chomet da virriken

Redek a rin a dastoun, gant glac'har, gant anken
 O Jesus! ato bale ebars ar memez hent
 Ato sellet a zioch ebars er noz eb pen!

hogen! perag e c'hoarzes, klasger malicius!
 Na Pellac'h e c'hez te? a pe hanno e teus?
 Me sonje din e wan ?r Kossan war ar bed man
 ha Setu e meus kavet ma far, vel ma velan.

326 verso)

— Sinvas dime! Bugel, eme ?r Barwrenté
 Te a zo neve ganet e Komparaizon dime
 Te a zo war ar bed Setu seitek kant vla!
 Me zo boe pemp mil tremen, na pini ?r c'hossan ta!

Adam, on tad genta a bec'harz dre semp det
 Hag en he di e voan en amzer ze ganet.
 Al barwé e rugale o deus hanon maget
 Hag a kredan a rejont bete termen ar bed.

— Na leret din ho hanno, pe seurt micher a ret?
 — Barwrentez, emean, me a zo bed hanvet.
 Ma brassan plijadur zo tourmenté ar bed
 Me zo pen deus ar gwall, tad an oll kruelded.

327 verso)

Me a meus bed halet an tud, evel Kourrez
 Gant an naon, ar rion, ar Serc'het hag ar mez
 Hag a meus eostet nag evel malannou
 Daero, grigonvrez ha milligadennoù.

Bep beure, bars ar bed me a ra eun bale
 Al pa meus me bizitet an dud paour, hep tale
 Monet a ran a biou dor an den finvidik
 Ewit Kregi ive eun esken deus he c'hik.

Na Kredan ket, den koz, ar peg a leveret
 En ti ar re finvidik nen doc'h ket recevet
 Rag gant ho botou pren e zoc'h meurbet trouzus
 Al re a astul zo ebars ho fillo drus.

328 verso)

— Gant an tud finvidikan me a reio tud paour
 En ti nobl a viskoas vel en ti ar varc'hadour

188

Wit digeri an nor din emeus diou vignonez
ho hanno a zo vendet, a didalvedigez.

— O breman, den miliget te a zo anaveet
Mar de te eo an hini a doujrmant an oll bed
Pella ! affronter koz, Pella, skuiz on meurbet
Pella ! wit tereket oit, redek ne allan ket.

Ma vijen bed ar mest e vijes te maro
Koustkoude maleirussoc'h ewidon te a zo.
Poanius on war an douar, skuil a ran daëro !
Punisset on gant Doue ! te a zo he bourreo !

—
7

[pas de trad. franç.]